



6



ITRON VARIA AR FOLGOET PEDIT EVIDOMP.

CANTIC

ITRON VARIA AR FOLGOËT.

Var ton : *Guers Lo-Christ an izelvet.*

D'ar sùl araoe guel an oll Sænt,
Er blavez dec-a-tri-uguent
Euz ar pevarzeevet canvet,
Comprenit-en mad, Bretonet :

E tecedas Salaun ar foll,
Casseet, rebutet gant an oll,
Tretet a zot, disquiantet,
Eb croas, na belec anterret.

Gouscoude e vuez a von bet
Eur squer, un exempl vad bepret :
Yun, cousquet var an douar yen
Ac humbl goulen an aluzen.

Ave Maria, emezan,
Selaouit-ta mad anezan,
Selaouit : *Ave Maria*,
Salaun a zeppre bara.

Cetu e beden ordinal :
Credabl ne vouie hini al ;
Er façon-ze, dre Lesneven,
Eo e c'houlle an aluzen.

E chars eur feunteun, eul lochen
Savet a zindan eur vezen,
A serviche de logeiz
E pep amser, nos a deiz.

Eno cousquet var ar c'halet,
Oc'h imita an hermitet,
Divar bara a dour e veve,
Eb jamas quen magadure.

Evit gallout en-em doman,
P'en-em zante rivet er goan,
A ispill oc'h eur brancq neuze
C'hen-em vransquelle a zoare.

E keit a ma c'hen-em ige
Ous ar brancq guezen evel-se,
O ! ô ! ô ! ô ! ô ! ô ! Maria !
E vije elevet o cana.

An dud divardro a grede
E ranque bea sot an den-ze,
Ac etrezo n'er galvent oll
Partout nemet Salaun ar foll.

Erfin, decedet p'er c'haf-jont,
En anterri a zecid-jont.
Dindan e vezen, dre n'allent qet
En laqât, emozo, er veret.

Nac e binigennou calet,
Nac e oræson qer brudet,
Tra, emezo, ne doant oll
Nemet ar merq euz eun den foll.

Bref, n'er c'havont qet din a gren
Da vea anterret e christen,
Ac eno en douar ractal
Er plantont evel ar chatal.

Mæs Doue, a bini ar gallout
A deu, pa gar, a ben a dout,
Evit lezel exempl a squer,
A brouy vertuz e zervicher.

Eur fleurdilizen gaër-meurbet
Euz ar bez souden zo savet,
A var e deillou ar c'homsou-mâ
O Mari ! Ave Maria.

Eur seurt miracl eur vech brudet,
Tud a bep bro zo diredet :
Tud simpl, noblanç, a bæleyen,
A velet o tond a vanden.

Enô da Vari eun Ilis
Batissa, oll ezint avis,
E memor ac e testeni
Ar miracl-se græt dre enni.

An due a Vreiz gant ardeur vras
De batissa en-em bressas ;
An Ilis savet a zo anvet :
Irc'h Varia ar Folgœr.

M

Euz ar moment-ze, cals duget,
Dugetet, princeet, princezet,
D'ar Folgoët zo deut da bardona,
A da Vari d'en-em voesta.

Ac ar pez en deuz e'hoas tennet
D'ar Folgoët cals pelerinet,
Eo an indulgeañcou caër
Eoni qer staneq a e'honezer.

Er Folgoët memez induljañç,
A e'hraçou memez abundañç,
Vel zo e Rom a induljañcou
En eur ober e stationou.

Ouspen indulgeañcou Bethlêm
Ac ive re Jerusalem
Re sant Jacques a ajouter
A re Laureta, en eur g'er

Ed ar bloas, o sacramanti
Pelerin devot da Vari,
Indulgeañç plenier en Ilis-mâ
Zo sur a certain evittâ.

Beb oferen d'an deiziou lûn
Vit an anson bep sizun,
Indulgeañç plenier d'an nep pini
En tan e'hoas, a ve o tevi.

Bep sul, beh guel, pâd mis Maë,
Tud a bep bro, a bep contre,
En o dourn croas a chapelet,
D'ar Folgoët, devot a zired.

Ouspen an indulgeañcou-ze
Accordet oll gant Jûl trede,
Cals a re-al a gaffen e'hoas
Fontet aman gant tri Bap bras.

Cetu-int amân an tri Bap-ze,
Dalc'hit sonj mad : Sixt pevare,
Innoçant eis a Leon deevet,
O zri d'ar Folgoët devouet.

Da oll bardonnioù ar Folgoët
Deja o devoa accordet
Da jaæs cant devez pardon
D'an oïl belerinet guirriou.

Ar pardonniou principalla
A celebrer en Ilis-mâ :
E mis eost, *ar sùl quenta* ;
Er memèz miz, *guel Maria*.

D'an eisvet à vis guengolo
E teu pelerin a bel-bro,
Ennez eo deiz ar pardon-braz ;
Mari en deiz-ze a e'hanas.

Oh pebez dudi eo guelet
Processionou caër-meurbet
O tond d'ar Folgoët en deiziou-ze,
Evit saludi Mam Doue !

Processionou Lesneven,
Re Plouzeniel a Sant-Even,
Re Kernouez ac an Drennec,
Ac ive re Tregarantec.

Tud elan, tud infirm, impotent,
C'hui pere a guez e drouc Sant,
A e'hui, graguez paour poagniet,
Da Vari-ta en-em voestet.

Er brezellou, var ar mor don,
E creiz an danger, an drahison,
N'ouffac'h qet ober guelloe'h tra
Vit d'ar Folgoët en-em voesta.

Ar branelloù a zo chomet
Ac a veler choas er Folgoët,
N'ellont beza nemet mercou
Euz e faveur e miraclou.

Deut-età oll, à vir galon,
Deut oll gant guir devotion,
Deut d'ar Folgoët da bardona,
Deut da Vari d'en-em voesta

Deut c'hui pere ne ouzoc'h qet
Da beseurt stad e zoc'h galvet :
Er Folgoët, an Itron Varia
A zesqo deoc'h an ent surra.

AMEN.

